

Fichier 2 . Version bretonne en transcription brute

Honn deputeed hag al labour douar

Tin. — Ne glevan ket komz kalz o defe great vad hon deputeed evidomp-ni er Gambr hag e lec'h all ?

Yeun. — Tra, rak n'ho deuz ket gret nemeur, feiz !

Tin. — Petra ho deuz gret ta vel 'ato ?

Yeun. — Fidandoustik ! votet o deuz ugent real var ann ed euz ar broiou ail (evel ma doa gret dija hon deputeed p'oant republicanet, a pere, ma vijent bed chomet, o dijc great memez tra), a netra ken. A setu tout ar pezh o deuz great hag ar pezh int kapabl da ober. Tud nul !

Tin. — Neuz bet nemet-ho da voti ann dra-ze ?

Yeun. — Neuze 'ta? N'int ket ken eiz ugent er Gambr, hag diminui reont bemdez c'hoaz, rak brema, hep tro ma vo election nevez en eun departamant bennog, e vez hanvet eur republican ; penefe ma oa ar republikaned moderet enno, Meline, Dévelle, hag ar re-all, al lezen-ze noe vije ket passead.

Ar re-man eo ho deuz difennet al lezen hag he voted. Guir eo kalz re venn, mez paz tout, o deuz voted gantho : setu, er mod se, al lezen zo bed gret.

Tin. — Me gave d'in koulskoude ar re- venn a reo ho fossubl evidomp ni.

Yeun. — Ia, tanfoult ! prometti d'oa gret e raejant evidomp ann diaoul hag e bevar. Mez, kez da bourmen, eur vech hanvet e reont goab ac'hanomp, ha mad a reont digor deomp

hon daoulagat, evit ampech ac'hanomp da véa sod awalc'h da voti evitho eur vech all.

Prometti zo eun, hag ober zo eun all.

Tin. — Ia, guir eo. Hag evit C'homiçou, ober a reont eun draik benag ive ?

Yeun. — Nebeut a dra, Tin ! Nebeut, ma fod. Evel-se ann A. de Legge, en eur arreti enn he zizkourz ann A. Hémon. e Briec. a lavare n'oa ket bed morse manket da vont da gomiç Bleyben, he ganton. Hag irio eo prouvet mad penoz ann A. de Legge (eun den *comme il faut*, var ann tu a henep, m'ar deuz eun !) enn eur ober *dek vloaz*, klevet a rez, Tin, e *dek vloaz*, ma fod, hen deuz gellet rei *eur skoet*, mez kleo 'ta, Tin, !!!

Tin — Mez klevout a ran, Yeun ; peuz kot ezomm da grial kement-se evit eur skoet, ken nebeut all a dra. Me n'on kel pinvidik, peil deuz enno, hag em euz em chakod muioc'h evit-se.

Yeun. — Ma ! eur skoet hepken hen deuz roët ennhez e dek vloaz evit sikour rei prichou da ganton Pleyben. Evit ar vech-ma sur, ann A. Caurant enn deuz da ziuall ! Ma digommet a viziken gant ann de Legge ! Ker enn do, evel ma ra, rei arc'bant enn tu-man hag enn tu honr, mont he-unan da gement konkourz braz ha bihan zo tro var dro, d'ar Faou. Kastellin, Pleyben, Landerne, Daoulas, Lesneven, Brest, etc., etc., ann A. de Legge, gant he skoet a zek vloaz, enn do muioc'h a vœchou evithan.

Tin. — Oh ! n'hen do ket. Dont a ra ann dud da veled sklear enn ho faperiou hg enn ho gavier. Evidom-me zo bed trompet gantho ha ne vinn ket ken. Mez petra a c'helfa de Legge bea gret evit ar c'hantoniou ail deuz ann departamant, m'a n'euz great ken nebeut evit he-hini ?

Yeun. — Oh ! netra, a gredan. Petra a gav d'id enn dijo great hennès evit paizanted kantonioù Ponabat, Rosporden, Brieg, Kemper, Plabenneg, hag ar re-all ? Netra tout. A pa gomzan d'id deuz Plabennec, enno ann *A. Chevillotte* hag ann *A. Boucher* ho deuz great ivo fêgur fall, evel *Roussin a de Legge* e Brieg. Tud nul, tout ar re-ze, pa ve kistion d'ober eun dra-benag, pe da explika d'omp petra deuz gret. Da brometti d'omp, avad, n'euz ket par deo. Mez da gendelc'her n'euz ket falloc'h evitho, Ma oufe ann holl dud vad kemen-se, ped a ve da rei ho moez deo ? — Den mad ebed. Setu perag, Tin, eo red d'eomp kaout eun tam deskadurez, ar pezh a c'houlenn ar republicanet hag ar pezh a spont ar re-ven. Rak enn dervez ma vo desket ann all, no vo ket a voien da lakat ann dud da vea tied egiz irio.

Tin. — Kredi ran, Yeun, penoz evit ann abaden genta, tud Kerne a vote c'hoaz guelloc'h eget ar vech divea, ha penoz tud Leon ive a deuio da zikour ac'hanomp da gas ar seurt tud-ze d'ar gêr, ha da lakat en ho flaç republicaned mad ha douget evit al laborerien douar.

Yeun. — Ar poz a zaziran eo, Tin, evit hor mad hon-unan, hag dreist-oll evil mad hor hro geaz.

FUR1K, deuz kanton Kastellin

Le Finistère, 15 octobre 1887
